

UR SKRIVAGNER, TEIR DANEVEL Aozadur 2010/2011

Aozet e vez an darvoud « Ur skrivagner, teir danevell, gant ar gevredigezh fea, e penn ar c'honkour «Priz ar Yaouankiz », abaoe 8 vloaz ha Priz ar Vugale abaoe 4 vloaz. Gant ar c'hoant lakaat ar skolajidi hag al liseidi da skrivañ evit tud yaouank evelto, ha da ijin istorioù plijus, eo bet savet, gant sikour ar Rannvro hag a drugarez d'ar gelennerien ha d'ar skrivagnerien a-du evit kemer perzh, an abadenn-mañ.

Lennet e vez gant ar skolajidi/liseidi, ur c'hlasad, hag ar c'helenner an daneveloù skrivet gant ar skrivagner (ez) (priz ar yaouankiz, priz ar vugale, al Liamm, ...). Prenet e vo al levrioù gant ar gevredigezh fea, ul levr dre skolajiad pe lisead.

Ur wech lennet ganto, dont a ra ar skrivagner(ez) ur wech er c'hlas evit kejañ ouzh ar re yaouank, komz deus an daneveloù, penaos oant bet savet, penaos echuiñ

Kregiñ a ra ar re yaouank da skrivañ gant sikour ar c'helenner daneveloù, bizskrivet ganto (6000/12000 sin d'ar muiañ), votet e vez er c'hlas evit an teir danevel a blij dezho ar muiañ

An tri skrivagner yaouank a ya e darempred gant ar skrivagner evit peurlipat an tri skrid (lojik an istor, geriaoueg, divizhoù ...), dre bostel

Ur wech echu al labour e vez kinniget da Briz ar yaouankiz pe Briz ar Vugale an dastumadeg graet gant ar c'hlasad (deadline : 14 a viz Meurzh 2011)

da skouer

- miz Here-miz Du : lenn daneveloù ar skrivagner
- miz Kerzu : degemer anezhañ/anezhi er c'hlas
- miz Genver : skrivañ ha keñveriañ ar skridoù
- miz C'hwevrer : pep skrivagner a sikour tri den yaouank
- 14 a viz Meurzh : kaset an holl skridoù da fêa
- miz Ebrel : emvod priziañ gant ar skipailhoù, pedet gant fea
- fin miz Mae : dibab ar juri, danevelloù a vo embannet evit priz ar Yaouankiz ha Priz ar Vugale

Dieub eo ar skrivagner(ez) da ginnig d'ar re yaouank pajenn gentañ tri skrid disheñvel evit sikour anezho da gregiñ. Alies e vez aesoc'h dezho kregiñ da skrivan pa vez dikouezhet dezho un hent da heu

Da bep skipailh kelenner/skrivagner(ez) da gaout ur mont en dro a ya mat dezhañ. Gouestlet e vo ur sammad arc'hant (ur yalc'had a zo bet gant ar Rannvro) evit frejoù hent ha labour ar skrivagner (eurvezhioù tremenet er c'hlas hag evit sikour ar skrivagnerien yaouank, difaziañ, ...), o heuliañ patrom ar pezh a vez graet evit ar skrivagnerien e galleg (cf Prix des Incorruptibles).

Skipailhoù

Sten Charbonneau / Mai-Ewen (priz ar vugale) – skolaj Diwan Kemper
Silvain Peron / Pierre-Emmanuel Marais (priz ar yaouankiz) – skolaj Diwan Naoned
Dominig Jolivet / Mich Beyer (priz ar yaouankiz) – lise Diwan Karaez
Yann-Fanch Jacq/ ? : (priz ar vugale) – skolaj Diwan Ar Releg

Frejoù :

-difrejet an dud evit ar frejoù-hent (mont d'ar skolaj, emvodoù ...)

- pep skrivagner a gont an eurvezhioù labour ha paet e vo gant fea al labour graet (kevrad da ober pa vo kroget al labour) gant ur feur a vo roet deoc'h gant an teñzorer.